

NANN, N'EUS KET E BREIZ

Euz kantikou Sant Brieg (Nn 135)



Diskan :

**Nann, n'eus ket e Breiz, nann, n'eus ket unan,
 Nann, n'eus ket eur zant evel sant Erwan. (2 w)**

1. N'eus ket en Argoad, na mui en Arvor,
Koulz ha sant Erwan 'vid an dud a vor. (2 w)
2. Nann, n'eus ket er vro, 'vel ma lavarer,
Hag a ve ken mad 'vid al labourer. (2 w)
3. N'eus kaerroc'h sikour d'an dud a lezenn
Eged sant Erwan, skwer ar veleien. (2 w)
4. Ha d'ar beorien gêz ha d'an dud a boan,
Nann, n'eus ket gwelloc'h eged sant Erwan. (2 w)
5. E-pad e vuez, eur skwer 'vid an oll ;
Bevom eveldañ, ne d'aim ket da goll. (2 w)

NON, IL N'Y A PAS EN BRETAGNE

R: Non, il n'y a pas en Bretagne, non, il n'y en a pas un
Non, il n'y a pas un saint comme Saint Yves.

1. En Argoat, pas plus qu'en Armor,
Il n'y a aussi bien que Saint Yves pour les gens de mer.
2. Non, il n'y a pas dans tout le pays, on le dit partout,
Qui soit aussi bon pour les laboureurs.
3. Il n'y a pas de plus beau secours pour les gens de loi
Que Saint Yves, modèle des prêtres.
4. Et pour les pauvres et les gens qui souffrent,
Non, il n'y a pas mieux que Saint Yves.
5. Durant sa vie, un exemple pour tous ;
Vivons comme lui, et nous n'irons pas à notre perte.